

(I)

B I S K O A Z

K E M E N D - A L L !

mmmmmmmmmmmmmmmmmmmmmm

Aneil evit egile

gant

Per HELIAS

-:-:-:-:-:-

C'hoarierien :

=JAKEZ KROC'HEN

=GWILHOU VIHAN

=AN AOTROU MER

JAKEZ ha GWILHOU a zo asezet e sal an Ti-Kêr, o c'hor-toz. JAKEZ a lenn ar c'heleier, e lunedou gantañ war e fri. GWILHOU, eur wech an amzer, a zic'henaou. GWILHOU emañ gantañ e zilhad sul; JAKEZ a zo war pemdez.

GWILHOU.- Jakez, me a gav hir ma amzer.

JAKEZ.- O, sez kant barriken! Hemañ a zo gwasoc'h eget ar vugale. Hemañ a vefe gouest da c'hoari mouchig-dall e buro an aotrou Mér. Ne teus ket mez, Gwilhou Vihan?

GWILHOU.- Nann 'vat! Mez n'am eus ket. C'hoant kousket a deu din bep tro ma taolan ma feskennou war eur gador hep kacut netra da zrebi na da eva dirazon. Petra fell dit, Jakez! E-giz-se emon. (Dic'henaoui a ra.)

JAKEZ.- Serr da c'henou 'ta, beg bras, gant aon na deufe al loar da goueza e-barz.

GWILHOU.- Ec'hi! Ne gaven ket mat an amann koz, Jakez. Ha dres, gwir eo, Chefig Lagad-Pikouz a lak eur peziad amann koz war he bleo bep mintin evit lakat anezo da jom dindan he c'hoef.

JAKEZ..- Gwilhou, te a dor din ma fenn gant sotoniou. Peoc'h!

GWILHOU..- Met, Jakez, n'on ket evit ober peoc'h.

JAKEZ..- Ha perak 'ta, aotrou Gwilhou?

GWILHOU..- Ablamouram eus eur bern traou da c'houlenn ouzit.

(JAKEZ a zastum e gazetenn, drouk du ennañ)

JAKEZ..- N'ouzon ket penaos am eus sterniet ouz eur spered tougn egizdout, Gwilhou! Te a zo dres e stad eur paotrig bihan a zo chomet berr da zont bras. Ha petra teus da c'houlenn ouzin? Gwelomp 'ta!

GWILHOU..- Jakez, ped eur eo?

JAKEZ..- Sac'h al ludu gris, dek gwech am eus lavaret dit ped eur e oa!

GWILHOU..- Ya, Jakez, met bremañ, paotr paour, n'eo ket ar memes eur eget an dek gwech kenta. An eur teus lavaret din bremaik ne dalvez mui netra.

JAKEZ..- Dek eur nemet sez munut hag eun hanter karturon, la!

GWILHOU..- Ha da bed eur e teu an aotrou Mèr?

JAKEZ..- Da zek eur eo boazet da zigouezout bemdez en ti-kêr. Hervez pez a lavare din dioustu ar sekretour, an dense a zo gwasoc'h eget eun orolaj, ken mat eo savet e boueziou dezañ. Biskoaz n'eo bet paket diwezat. Prenn ar boton war da chupenn, Gwilhou, ha tenn war da vñcheier. Arabat dit en em ziskouez dirak lagad ar Mèr e-giz eun termaji daou-wenneg. (Renka a ra e zilhad da Wilhou.)

GWILHOU..- Jakez, ne geran ket beza gant ma diliad sul war ar pemdez. Kredi a ran emon o vent d'eun interamant. Ha kaer am eus klask, n'ouzon ket piou a zo maro, eveljust.

JAKEZ..- An devez-mañ, Gwilhou, a zo ken kaer hag eun dévez sul evidout. Rak-se, chom fur, ma mabig, ha taol evez.

GWILHOU..- Ped eur eo, Jakez?

JAKEZ..- Eur wech all adarre! (tenna ra e vontr) War-dro pemp munud hanter.

GWILHOU..- Itron Varia! An amzer a dro gwall buan, Jakez, war ma ^{seufe} meno. Marteze da vontr a zo eun tammig abred?

JAKEZ..- Nann. Eur montr mat am eus. Hag ar mintin-mañ eo bet laket ganin dres war an sñjelus. N'eus ket da fazia ganti.

GWILHOU..- (eur c'hoarzadennig flour) Met, Jakez, marteze ar c'hloc'her a zo dihunet re abred ar mintin-mañ. Soñj am eus, pa oan-me kloc'her e Poullbrug, da veza brallet ar c'hlleier, eur wech, da hanter-noz, ablamour...

JAKEZ..- Arzodig penn-yod! Diwall mat da gomz d'an aotrou Mèr

- deus an taol-ze. A-hend-all eo kollet an afer.
- GWILHOU.- Kollet an afer? Ha perak, Jakez, mar plij?
- JAKEZ.- Perak? Ès eo da gompreñ penaos eur mèr n'en do fizian
ebet en eun den a zav dre greiz an noz da vralla ar
c'hlleier, ta! Ret e oa dit beza mezo-dall, koulskoude,
evit ober eun taol e-giz-se!
- GWILHOU.- Jakez, hen toui a ran dit, ne oa banne ebet ganin,
~~fuge~~ pa c'hoarvezas ar fazi-ze. An dud a laver hag a zisla-
var a-wechou hep gouzout na penaos na perak. D'an am-
zer-ze, n'am moa ket c'hoaz montr ma zad. Hag evit son
an añjillus, me a rë deus kan ar c'hejer tro-war-dro.
Ar c'hejer a gan, kustum, pa zav an heol. Met ar wech-
mañ, n'ouzon ket peseurt kleñved a zo ~~peget~~ enno, int
kroget da gana da hanter-noz. Ha me kuit d'an daoulamm
d'an iliz da denna war ar gorden.
- JAKEZ.- Mat, mat! Din-me ne ra netra, na tomm, na yen, Gwil-
hou. Mezo pe divezo, brallet teus ar c'hlleier da hanter
noz, ha spontet an holl dud er barrez, peogwir int dcut
er-mèz deus o zier, divoutou, pastell o roched o nijal
war o divesker, ha sailhadou dour ganto a-istrabilh
deus o daouarn, rak kredi a rënt e oa an tan-gwall en
eun tu bennak. Peseurt dispac'h! Eun taol kaer teus
grët, Gwilhou, eun taol kaer, ya!
- GWILHOU.- Selaou, Jakez, ar wirionez: ar c'hejer a oa kroget
da gana...
- JAKEZ.- Netra! Gwir pe gaou, pemzek vloaz tremenet a zo  baoc
ar brall-ze. An aotrou M r koz, - Doue d'e bardono! - a
zo maro, hag an darn-vuia deus an dud o deus dizoñjet.
Met arabat eo dit digeri da c'henou war ar poent-sc.
- GWILHOU.- Mat! Me a jomo m t e-giz eur pesk.
- JAKEZ.- Lesk ac'hanon da respont d'an aotrou M r!
- GWILHOU.- Mat-tre, Jakez.
- JAKEZ.- Ha laver dres egizdon bep tro!
- GWILHOU.- Ya, Jakez.
- JAKEZ.- Hag eur wech an amzer, distag eur ger bennak leun a
furnez hag a skiant-vat, ma c'hellez!
- GWILHOU.- N'eo ket di s, Jakez. Dont a raio ganin mat-tre.
- JAKEZ (o sellet deus e vontr).- Peder minutenn a jom c'hoaz.
- GWILHOU.- Peder minutenn! Sant Tujen benniget! Jakez, seul
vui ma tosta an eur d'en em gavout dirak an aotrou M r,
seul wasoc'h aon am eus. An dour-pilh a red warnon penn
da-benn. Ma roched a zo gleb-teil, ken e stag ouz ma
c'hein. Moarvat e vefe gwelloc'h deomp distrei d'ar g r,
rak ne deuimp ket...

JAKEZ (kounaret).- Gwilhou, keit ha ma pado ma buhez, ne rin nemet koll amzer ganit. Gouest out da lakat droug ruz da zevvel e kalon eur c'hristen, sell! Eomp d'ar gêr! Met selaou mat! Adalek hirio, ne dalvezo ket dit dont da glask sikour diganin. Eomp kuit gant an diaoul!

GWILHOU.- Nann, Jakez, koulz eo deomp chom, peogwir omp deut betek amañ. Marianna a zo o c'hortoz er-mêz, hag eun abdenn skrijus am mefe diganti ma 'z afen kuit hep kaozeal ouz an aotrou Mêr.

JAKEZ.- Ha, ha! Loen brao! Muic'h aon teus c'hoaz dirak Marian-na eget dirak an aotrou Mêr, ha n'eo ket?

GWILHOU.- Feiz ya 'vat! Eun den n'eo nemet eun den, evit dezañ beza mèr. E-lec'h eur vaouez e-giz Marianna Vihan, ar gwella tra d'ober ganti eo stanka an diskouarn da c'hortoz ma vo echu ar gasadenn.

JAKEZ.- Gwir awalc'h. Met penaos, Gwilhou, n'am eus ket goulenet ouzit perak e felle dit kuitât ar vicher labourer-douar evit gouleñn eur garg gward-mêziou? Marteze out èt skuiz gant da dog ledan hag e kavfes brao kaout eur galabousenn, eur "c'hepi" war da vleo?

GWILHOU.- Jakez, ma fell din beza gward-mêziou, n'eo ket hep penn na lost. Da genta, ar vicher a zo brudet mat e-touez an dud.

JAKEZ.- Gwir eo!

GWILHOU.- Ha me am eus grët n'ouzon pet micher war-nugent, divaoc'h an eil eget eben. Poent eo din dont fur.

JAKEZ.- Poent bras, Gwilhou, poent bras.

GWILHOU.- D'an eil, gant ar vicher-ze e vin e-pad an deiz o redek ar mèziou hag o tiwall al lezenn. Setu ne welin Marianna nemet an nebeuta posubl. Ha peoc'h d'ar paotr Wilhou! Ha, ha!

JAKEZ.- Sell! Mat eo renket an traou ganit, Gwilhou, ma mab.

GWILHOU.- Jakez, marteze n'am eus ket eur spéred bras, na deska-durez, na netra. Marteze on eun den sonig ha spontet buan. Met, war traou a zo on finoc'h eget eul louarn koz, ya.

JAKEZ.- Gwelet a ran. N'on ket evit tostât ouzit, Gwilhou. Tre c'het on ar wech-mañ.

GWILHOU.- O, Jakez, etrezomp hon daou, ma vefe ret gouzout piou a zo gantañ ar brasa skiant vat, meur a hini a vefe souezet, moarvat. He, he!

JAKEZ.- Ne lavaran ket, Gwilhacuig. Gwelet mat a ran n'out ket ganet e penn diweza ar zizun.

GWILHOU.- Nann! ha kavet am eus an tu bremañ d'en em zizoher deus Marianna. E-lec'h te a jomo atao da veza gwasket gant Katellig Beg-Minergez. Chafis vat dit, Jakez. Ha, ha!

JAKEZ. - Met, Gwilhou, lavaret a veze emout oc'h ober goasp ouzin! Gwall abred eo troet da benn gant an ourgouilh, hervez ar pez a wel. Ne vo ket brao kaout afer ganit pa vi "gward-champetr", nann!

GWILHOU. - Eur "gward-champetr" a zo e-touez pennou-bras ar barrez. Setu eo dao dezañ heulia e renk. N'ouzon ket, Jakez, ha gellet a rin kaozeal ganit alies. Rak te a zo eun den truilh awalc'h, hag ouspenn re vignon d'ar we-renn.

JAKEZ. - Truilh? Mignon d'ar werenn? Arsa, fri-téil, deut eo bras an tamm ouzout. Piou en deus prestet dit ar chupenn-mañ, ma chupenn eured? Ha piou a vez o c'hlebia dit da c'hourlañchenn bep mare, peogwir n'eus biskoaz liou eur gwenneg toull ganit? Ho, ho, mabig, m'emout e-touez ar pennou-bras, ne teus ket ezomm deus ma c'hompagegnenez. (Sevel a ra, ha war-du an nor) Kenavo, Gwilhou Vihan! Te a zisplego da-unan ar goulenn d'an aotrou Mér.

GWILHOU. - Jakez, Jakez, ma mignon, keuz am eus da veza lavaret sotoniou. Dre ma 'z eus dilhad sul ganin e kred din beza eun aotrou. Keuz am eus. Chom ganin, Jakezig. M'hen talvezo dit eun devez bennak. N'on ket goust d'en em ziluzia hep kaout ac'hanout em c'hichen, te oar mat.

JAKEZ. - Paour k'ez denig! Mat; peoc'h. Ne jom mui nemet eur vnutenn ganeomp. Prometet am eus ha derc'hel a rin, ken divalo e hellfes beza. Tenn da dog ha sav da vrugou, Gwilhou. Ha sec'h da fri. Atao e vez o tivera.

GWILHOU. - Jakez, ret eo din ober eun esa c'hoaz war an dapoulin hag an embannaduricu, kenkas e c'houleñfe ar Mér ouzin penaos e vez grët ar vicher.

JAKEZ. - Buan, neuze.

(GWILHOU a gemer eur baner koad a zo dindan buro ar mér hag a dalvez da zastum ar paper kollet, ha diou vazig evit tenna linennou. Ha da dapouлина.)

GWILHOU. - Selaquit, tud vat, hag ar re èll iveau. Piou bennak a zo bouzar a gasc ar c'helou da biou bennak a zo dall. (Skarza a ra e c'houg) Dimerc'her kenta e vo gwerzet eur stal labourerez-douar e Keristribilh. Pemzek devez arat, daou varc'h, unnek buoc'h-lèz...

(Dek eur a zon; GWILHOU a jom sabatuet ha ne oar ket petra ober gant e vinviou. - D'an dekvet taol, ar Mér a zigor an nor.)

An Aotrou MER. - (o sellet ouz e vontr) Salud, Jakez ha Gwilhou. Mont a ra mat ganeoc'h? Ma montr a zo direnket, me gev din. Tostik eun hanter-minutenn emei war-lerc'h an eur. Ma talc'h da vont a-dreuz gant e hent, e vo gwelloc'h din ober diouz an añjillus, bremaik.

GWILHOU. - O, nann, aotrou Mér. Arabat eo deoc'h fiziout war an

añjelus. An añjelus ne dalvez netra evit an eur vat. Sel-lit! Soñj am eu., pa oan-me kloc'her e Poullbrug, da veze brallet ar...

(JAKEZ a dor ar paz, spontus)

An Ao. MER..- Eur gwall baz a zo ganeoc'h, Jakez Kroc'hen. Tapet hoc'h eus yen?

JAKEZ..- Nann, nann, aotrou Mèr. Eur gasadenn n'eo ken. Ni a oa deut d'ho kavout hon dacu, Gwilhou ha me, diwar-benn ar garg "gward-mèziou" a zo diberc'henn, hervez ar pez a zo bet lavaret deomp.

AR MER..- Ya. Bez ez eus eur garg "gward-mèziou", met unen hep-ken. Ha daou emoc'h.

GWILHOU..- Me es an:hini en em lak war ar renk.

AR MER..- Mat. Neuze Jakez a hell mont d'e labour. Kenavo, Jakez.

GWILHOU..- Aotrou Mèr, Jakez ha me, ni a gemer ar memes hent da zistrei d'ar gér. Setu am eus lavaret dezañ chom d'am c'her-toz. Mar plij ganeoc'h, da vihana.

AR MER..- Evidon-me eo mat memes tra. Gwilhou, ar garg Gward-mèziou a c'heulenn eun den parfet.

GWILHOU ha JAKEZ..- Eveljust, aotrou Mèr.

AR MER..- Ha klevet am eus penaos e oas douget d'er boeson a-wecheu.

JAKEZ..- An dud o deus teodou fall, aotrou Mèr.

GWILHOU..- Aotrou Mèr, teodou fall o deus an dud.

AR MER..- Gwelet e vo diwezatoc'h. Gwilhou, me a garfe eur gward-mèziou hag en defe e "zantifikad". Er vicher-ze e vez allies ezomm da skriva. Bez ho peus bet ho santifikad?

JAKEZ (buau)..- Aotrou Mèr, ar zantifikad hon eus bet.

GWILHOU..- Bez hon eus eur zantifikad, aotrou Mèr.

AR MER..- Met, Jakez, cuz Gwilhou ec emon'o kaozeal. Peoc'h, mar plij. Gwilhou, diskouezit din ar zantifikad-se.

JAKEZ (a denn e hini)..- Setu amañ, aotrou Mèr.

GWILHOU..- Ya, aotrou Mèr, setu aze.

AR MER..- Met, ar zantifikad-mañ a zo laket war ane Jakez Kroc'hen. Hini Gwilhou Vihana fell din kaout.

JAKEZ..- Aotrou Mèr, ni a ra hon daou gant ar memes hini.

GWILHOU..- Ar memes hini a zelvij deomp'hon dacu, aotrou Mèr, gwir.

AR MER..- Echu eo ganeoc'h ober goap ouzon! Santifikad Jakez ne zelvij ket evit Gwilhou. E neblec'h! Gwilhou, d'an nebeuta, gwellomp ha gouest oc'h da skriva madik awalc'h. Kemerit an tamm paper-mañ ha skrivit warnañ: "REPUBLIQUE FRAN-

CAISE".

JAKEZ..- Dioustu, aotrou Mér. (Hag e ra) Setu aze.

GWILHOU..- Aotrou Mér, setu aze. Distaget mat al lizerennou, n'eo ket?

AR MER..- Sac'h an diaoul! Met piou, erfin, a zo o klask bezə Gward-mèziou? Gwilhou pe Jakez?

GWILHOU..- Me, aotrou Mér.

AR MER..- Mat. Neuze, kemerit an tamm pâper-mañ ha skrivit: "REPUBLIQUE FRANÇAISE".

GWILHOU..- Ne dalvez ket ar boan, aotrou Mér. Jakez en deus skrivet dija.

AR MER..- Ya, met c'houi an hini a zo war ar renk. Skrивит buan.

GWILHOU..- N'eo ket dao, aotrou Mér, a lavaran deoc'h. Me a skriv dres-e-giz Jakez. Heñvel-mik outañ.

AR MER..- A, ma lapous brao, n'oc'h ket gouest da skriva! Mat. Ezomm am eus da gaout eur gward-meziou. Jakez, c'houi hoc'h eus ho santifikad. Ma plij deoc'h ar garg, e vezoc'h anvet dioustu. Mont a ra deoc'h?

JAKEZ (sebezet)..- Mont a ra din, aotrou Mér.

AR MER..- Setu eun afer c'hrêt. Kenavo! Ret eo din mont da labourat gant ar sekretour. Warc'hoaz vintin, Jakez, arak eiz eur.

JAKEZ..- Ya, aotrou Mér. Kenavo. A, Gwilhou, kavet eur vicher vat ar wech-mañ. Trugarez dit da veza digaset ac'hanon ganit da gaout an aotrou Mér. Ne to ket a geuz, ma mignon. Ha, ha! Ha bremañ, ne vin ket mui dirak daoulegad Katellig. E-lec'h te, Gwilhou, a jomo dindan daouarn Marianna Bizied-Krog. Ha, ha!!! (Ha kuit)

GWILHOU..- Gurun ha tan! Eur wech-all ez in ma-unan d'ober ma aferiou. Ha me, sur, war ma meno, da veza anvet gward-mèziou, am eus grêt goap ouz Jakez. N'ec ket echu ganin klevet goaperez d'am zro. Seiz kant barrikenn! Biskoaz kemend-all!!

-- Lien --

Per HELIAS.

PEZIOU - C'HOARI PER HELIAS
::::::::::

E gwerz e ti AR BALB, B.P.108, Roazon:

1/BISKOAZ KEMEND-ALL: eul leorig ennañ 5 Pez-C'hoari berr, ès da c'hoari; evit 2 pe 3 c'hoarier.
eul leorig: 80 lur.

2/EUN TAOL-BRAO: pezig-c'hoari evit 4 c'hoarier (2 gwaz, 2 blac'h).
ar pez: 30 lur.

3/DAOU LAPOUS: pezig-c'hoari evit 4 c'hoarier (3 gwaz, 1 plac'h).
ar pez: 30 lur.

4/AN EIL EVIT EGILE: pez-c'hoari evit 3 c'hoarier (3 gwaz)
ar pez: 30 lur.

=====

PEZIOU-C'HOARI a vo embannet war "AR FALZ", unan war bep Niverenn.

Koumanantit da AR FALZ evit kaout eun dibab a beziou ès da c'hoari hag a blijo d'an dud.

Koumanant-bloaz: 500 lur ar bloaz, da gas da:

"GROUPE AR FALZ", B.P. I9, BREST.

"C.C.P. 430/20 Rennes."

=====

Esoc'h kalz eo rei d'ar c'hoarierien pep a skouerenn eus ar Pez-C'hoari a zo da zeskì, evit lakât anezzo da adskriva o lod!

Goulennit 'ta 3 pe 4 skouerenn eus ar pez-c'hoari, hervez ma vez ezomm:

Nebeut a zispign a vo, hag èsoc'h labour a vo grêt!